

# **Pennad I**

## **Rubi**

En em ginnig a ran : Rubinia Pyro. Ac'hanta ! Ne ouiit ket piv on ? N'anavezit ket ac'hanon ? Na rit ket biloù, dindan berr e voc'h desketoc'h. Lod en ho mesk o deus kejet ganin, hep gouzout deoc'h moarvat. Emaon o vont da enaouiñ gouloù ar c'hompren neuze. M'ho peus bet tro da strakal alumetez, klaoustre ho peus gwelet ma mousc'hoarzh. Geo, geo, bezit soñj ! Ur vaouez yaouank he blev flamm, muzelloù liv lila treset gant barr-livañ ar gened, o tigeriñ evel rideozioù c'hoariva war dent lufrus.

Evit bezañ sklaeroc'h : ar poltred kaer war ho poestad alumetez a zo ar plac'h a gomz ouzhoc'h. Bep bloaz abaoe m'emaon bet ganet e vezan tapet da skouer, ha gwelet ho peus ac'hanon o kreskiñ, o verzhout pe get e oac'h ambrouget ganin seul taol ma enaouit goulaouennoù-koar ho kwastilli deiz-ha-bloaz. Ma Zadig a zo rener an uzin Tan De'i, ul loen ramzel o talmiñ noz ha deiz diouzh lusk ar mekanikoù. Hon aerouant suj, o tivogediñ dre ar siminalioù uhel, arouez ar familh Pyro. Ma Zadig a lavar n'eus ket par da'm skeudenn evit desachañ ac'hanoc'h. Ho

kalonekaat a ran da blantañ tan en oaled, hag aotreañ a ran sigar meritet un devezh hir a labour frouezhus. Lavar' a ra ivez e ambrougan ar vatezh pa voueta ar geginerez.

Marteze e c'hortozan e foñs tiretenn ho purev, pe war stern ar siminal. Pe c'hoazh, marteze en em gavan e chakodig diabarzh ho jiletenn lêr. Evel-just, ledanoc'h eo ma sell, ha kargoù pouezusoc'h a ijinan pa spurmantan ma dazont. Ur post-labour gwir, arbennik, a fell din kaout digant ma Zadig, ha setu perak e c'hortoz fin ar bloavezhskol evit ober kuzulierez ar c'henwerzh ac'hanon. Nag un hunvre ! Derc'hel da vezañ arouez Tan De'i, dreist d'ar skeudenn. Me, Rubinia, korf ha spered evit dibuniñ arguzennoù na c'heller ket talañ outo. Pegen saourus e vo din ruzañ dre ar vro gant krozadennoù an tren-ludu.

E pep stal cheuc'h e tisplegin pegen ezhommek eo pep hini da brenañ ma frodu.

10

Seul ma botinezoù a strako lirzhin war bavezioù ar balioù brudetañ evit dasparzh tourioù uhel boestoù alumetez. Me 'vo servijet, ambrouget, moumounet, ha graet e vo "Itron" ac'hanon, a-vil-vern.

Gellet a rafec'h soñjal e tennan gounid eus ar vuhez klet am bez o vezañ merc'h-vihan ijinour an embregerezh. Met re aes e vefe krediñ se.

Labourat a raen start pa oa ar vugale all o koll amzer gant partiennoù unan-daou-tri heol pe o lakaat kanetennoù da ruilhal. Dav eo bet din atav deskiñ an hêrezh n'en deus ket gellet ma Zadig kelenn d'ur mabig, koulz ha bezañ plac'hig disi ma Mamm. Strivañ a ran ingal da vont pelloc'h, buanoc'h, gwelloc'h, ha diwar ma siriusted e kouezho aour. N'eo ket un emgav gant an diaoul a ginnigin da'm fratikoù met keuneud da vezañ mestr ha mestrez war an tan, boudiged an tiegezh.

Mamm a sko ouzh dor ma c’hambr ha dont tre a-raok kaout ma aotre. Nijal a ra leurenn ma faltazi, ha sachet on en-dro diouzh hunvreoù ar Gêr-Vras. Setu distro krizder ar wirionez : n’on ket kuzulierez war ar werzh c’hoazh, hag an hini nemetañ a gomzan outañ eo ma feroked en e gaouidell.

— Prantad kempenn a-raok kousket, Koantig !

Azezañ a ran ouzh an daol-fichañ ha lezel anezhi da ziluziañ ma blev gant he c’hrib, goustad ha taer, o sachañ war ar skoulmoù evit rediañ betek an disterañ blevenn da sujañ propik evel ma tle ober.

— Atav o soñjal er Gêr-Vras, hañ ?

— Dindan berr e c’hellin seveniñ ur garg dreistordinal, a respontan dezhi en ur ziskouez ur mousc’hoarzh ledanoc’h c’hoazh eget hini ar voest alumetez.

— Hunvreal betek re a c’hell degas dipit, Koantig.

Normal eo e vefe displijet gant ar mennozh-mañ, rak stanket eo amañ.

Silañ a ran korn blot ur chamallow etre barrennoù ar gaouidell, ha santout pigos ma feroked o kemer e c’hopr evit bezañ bet ur selaouer a-feson. Al loen pluek-mañ a zo fin a-walc’h evit kompren pegoulz e rank tevel, peurliesañ.

— Mammig, ma ouifes pegen bras eo an hiraezh am eus da veajiñ dreist d’ar vevenn, etrezek an neblec’h dianav !

Meneg ar bellvro a sko anezhi bep tro ha gwenn-kann eo bremañ tra ma sell dre ar prenestr. Ne verzhe ket he deus laosket ar grib e-kreiz ur skoulm, a-istribilh evel ur c’hlinkadur iskis.

E traoñ hon tour uhel, al labour na ehan ket, hag ar siminalioù bras a zic’hwezh o anal du, a-us d’ar c’hasedadoù leun a goad munud. Karget e vezont da c’houde war ar bigi ponner, o vont frankilik ha reoliek gant nerzh

ar c'hefluskerioù dre aezhenn. Douget gant red ar stêr, ez a an alumetez dre an trepas dour, ledet gant gwez pupli o deil krenus hag a seblant yaoual da hetin ur veaj vat. Ha zao etrezek pep korn ar vro ! Ni avat a chom gwriziennet amañ, ha Mamm a vez alies en hirnez, ken ma kav dezhi ez eo ur vleunienn weñvet a-raok bezañ bet an eurvad da zougen livioù kaer.

— Kustumiñ a reer, a lavar-hi pa glevan posubl eo bevañ amañ da viken. Da gentañ penn e oa poanius bezañ amañ. Ul labouradeg flaerius da amezegez ha koadeier gouez tro-dro deomp ! Pa oan a oad ganit ne oa netra desachusoc'h eget an opera, an diskouezadegoù, ha gwerzhadegoù oberennoù arz.

Sankañ a ra he bizied reut em blev en-dro, evel un emgann da gement skoilh, ha skarzhañ ar velkoni gant un ton laouenoù'h :

— Dre chañs, Nisefor en deus prometet din e kroufe kalz traoù evidon-me : savadurioù da rein ton d'hon dudioù plijusañ.

— Gwir eo, met gouzout a rit eo difin roll e bromesaoù. Pa oan bihan en doa touet e savfe ur zoo, hag er c'hortoz a ran c'hoazh.

— Ul labous az peus bet dija. Gant pasianted e roio dit ar pezh a fell dit, ma merc'hig.

— Ne chomin ket da c'hortoz. E dibenn ar bloavezh-skol em bo prouet dezhañ ez on dellezek eus ar post-labour, skoaz-ouzh-skoaz gantañ, evit ledañ atav sklêrijenn Tan De'i.

— Evit poent, n'eus netra graet, emezi, kevrinus.

Hag hi da drein kein, o lakaat ur pik echu d'ur gaozeadenn n'he deus ket c'hoant da genderc'hel. Ha keloù fall a zo war-nes kouezhañ war ma chouk ?

— Penaos 'ta ? Perak e lârez n'eus netra graet ? Un dibab all a vefe ?

Un dra bennak digomprenus a c'hoarvez a-greiz-holl : a-viskoazh eo bet lâret din em befe ur perzh a bouez da c'hoari. Soñjal a ra din emañ war ur neudenn voan a-us d'an donvor, o vreañsigellat.

— Ma notennoù a zo eus ar re wellañ. Me eo ar skoliadez varrekañ. Hag e verc'h on-me ! Embregerezh ar familh an hini eo ha roet e vez ar stur a-rumm-da-rumm. Den ebet na c'hell ober ar vicher-mañ ken koulz ha me. Poellek eo, ar pratikoù a zo boas da welet ac'hanon, evel p'o defe graet anaoudegezh ganin dija.

Strewiñ ma arguzennoù gant blaz an anken a hegaz Mamm. Ne rann grik, siellet he genoù evel pa vefe difennet groñs dezhi eskemm diwar-benn an danvez-mañ. Asantiñ hep displegadur n'eo ket ma doare. Eviti eo trawalc'h heuliañ Tadig met n'on ket evelti, sentus ha disi e pep keñver.

— Me ho ped, Mamm, emezon o lakaat ma dorn war hec'h hini. Lârit din petra 'c'hoari.

— Ma. Dre belec'h kregiñ ?

— Dre an hent eeunañ.

En em zizober a ra eus ma bizied hilligus. Digeriñ a ra hec'h aveler trumm, evel ur paun o tiskouez e bluñv d'an enebour.

— Disheñvel e vefe bet ma 'm befe roet ur mab dezhañ... Bez' zo ur stajiad nevez gant da Dadig, ha skoazellañ a ra kalz anezhañ war e raktres reiñ lañs d'ar marc'had etrebroadel... En em gompren a reont ken mat !

Gwiskañ a ran ma dremm porselen hag ober van bezañ laouen gant ar c'heloù.

— Dreist ! C'hoant em eus d'ober anaoudegezh gantañ.

E gwirionez, ne vern piv eo ar stajiad nevez, lakaet em eus em soñj distruj anezhañ. En un doare kran mar plij. Dizoloiñ a rin e bal, kavout e wanderioù d'o implij a-eneptañ.

— Mall ganin gwelet minor Tadig. Bez' e c'hellfemp pediñ anezhañ da goaniañ.

— Graet eo. Warc'hoazh da noz e keji gantañ. Prientet em eus pep tra.

Diaes eo din eskemm didrubuilh rak ma zrubardet he deus o kelaouiñ ac'hanon ken diwezhat. Tanfoeltr a bedadenn ! Setu me paket-mik dre zegouezh.

— Kerzh 'ta da staliañ an daol neuze ! a urzhian dezhi o vountañ fulor enni.

Ar bruched koeñvet hag ar c'hroñj uhel, e teu c'hoant dezhi respont gant ur flac'had.

— War un ton all, Rubinia. Mitizhien a zo evit se.

Un dagadenn eo eviti hag er gouzout a ran re vat. N'eus ket efedusoc'h eget keñveriañ anezhi gant perzhidi an ti, rak tremen a ra an hanter eus hec'h amzer vak o c'houlenn outi hec'h-unan ma n'eo ket deuet da vezañ un delwenn da ginklañ. Prennañ a ra an nor war he lerc'h. Un dro alc'hwez, hag unan all da islinennañ on bet re bell ganti. Moarvat ne vin ket aotreet da lakaat ma fri en diavaez a-raok ur pennadig. He mouezh yen sklas a dreuz an nor evel ul lavnenn lemm :

— Bez prest da seizh eur. Peg war da fas da vaskl merc'hig gentil. Da ali, den n'er c'houlennno diganit.

— Merc'hig gentil, merc'hig gentil ! eme ar peroked goapaus.

Ha setu me un alumetezenn bac'het en he boest, ur mousc'hoarzh peurbadel war he dremm.



## **PENNAD 2**

### **Bohort**

16

Trawalc'h eo teurel evezh ouzh diabarzh ur c'hlas ha sellet e pelec'h emañ azezet pep skoliad evit gouzout piv a vo Un Den, ha piv a varvo evel ur genaoueg, yaouank ha diglod, trec'het gant ar c'hleñved hag an naon. Me da skouer, a heul ar gentel eus foñs ar c'hlas. Amañ e c'hellan bezañ trankil ha disoursi, brañsigellat war daou bav a-dreñv ma c'hador gant un aer difoutre-kaer, ar pezh a laka da ziwan skleur an dispriz e daoulagad ar gelenner.

Ma zud a zo implijidi galonek ha kanet e vez meuleudi dezho en arbenn ma plegont d'al labour hep klemm, brav o devosion evit ar rener bras. Ha me, an diskennad, tonket da erlec'hiañ anezho mare pe vare. Sed aze ma flanedenn. Moullet on bet evit dougen unwisk Tan De'i, d'ober hag adober ar memes jestr diboell, hag an Itron Pikechu a oar kement-se. Setu perak e kav he lod o tarluchañ ac'hanon a-bell, tra ma vir he holl entan evit ar skolidi dibar.

Lârit din 'ta war beseurt renkennad ho peus taolet ho pouez hag e lârin deoc'h pehini a vo ho plas e dazont an uzin.



Ar re a zo dirak a lip gant plijadur sklabousoù ar ouiziegezh hag ar prederi. Gounezet eo evito ! An hini a respont d'ar goulennoù da ziwezhañ – da reiñ o chañs d'ar re all – a zo merc'hig-he-zad. Sonn war he c'hador, fichet-kaer ha sirius, he blev dalc'het brav gant ur seizenn. Sur on e krib start he moue-kazeg bep mintin evit herzel reveulzi ar blev diroll.

Pas, fiziañ a ran, evel-just : unan bennak all a ra se en he flas.

Ur vatezh bennak, pe he mamm, rak ne weler ket anezhi alies hag e rank servij d'un dra bennak e ranndioù divent e veurdez Pyro.

Gwisket eo Rubinia evel ma tle bezañ arouez ar gevredigezh sevenaet, gant danvezioù na servijont da netra nemet kinklañ. Pleg ebet, toull ebet, loustoni neblec'h. Er c'hontrol, na 'm eus-me biskoazh gwisket ul lavreg na oa ket bet implijet araozon.

Ar memes sonenn atav. An darn vrasañ ac'hanomp a vo bountet war-zu ar mekanikoù. Morse ne baouezont da chaokat. Da noz zoken, e troont, e trailhont, e pul-luc'hont, hag e c'hwezhont alumetez dre gementadoù sebezennus. Ne baouez ket ar produadur. Patron Pyro a gav e bourrapted e mod-se, ur boem. Ar wech diwezhañ m'en deus profet e vedalenn d'an Implijad Skouerius, en deus disklêriet e garantez evit trouzioù an uzin, heñvel ouzh ur galon a lakaomp holl da dalmañ dorn-ha-dorn.

Hag e verc'hig a oa en e gichen he meilh-dorn war he bruched, o c'hoari ar fromidig pa n'eo ket tommoc'h eget ar skorn.

Me am eus raktreset tec'hout. A-raok lec'hidenniñ ha dont da vezañ mad Tan De'i. Ne grevin ket amañ oc'h analiñ c'hwezh pistrius ar siminalioù, nag o terriñ ma

c'hein dre forzh treiñ un dornikell daonet. Anv kozh ar gêr zoken, a zo aet da get, ha ne anavezet bremañ al lec'h nemet dindan anv ar merk. Ar Forest tro-war-dro a vez aberzhet evit an aerouant a vouetomp dizehan d'e lakaat da gac'hat kasedadoù koad munud.

N'eo ket gwall stank an notennoù em c'haier nemetañ, met implij' a ran ar marz da skribouilhañ gant liv du dremm tric'hornek an aerouant kounnaret o pegañ an tan er fabrik a-bezh. Ijinañ abadenn ar glaou-ruz hag an tarzhadennoù a vount ur barrad dudi ennon.

— Bohort !

Harpet war he burev, war-bouez he divrec'h reut, emañ an Itron Pikechu o c'hortoz ur respont diganin, ha goulenn a ran gant ma roched abaoe pegoulz emañ o c'hervel ac'hanon. An aliesañ, he mouezh a zo ur son boud hag a rank strivañ evit ober he hent etrezek ma divskouarn. Kalz digoroc'h on d'ar boullou paper stlepet din gant merc'hed c'hoarzhus ar renk kentañ, Perlezenn hag Hortañsia.

— Itron ?

Troc'het ganti red ma frederioù, e welan anezhi o vont e gouez. Stegnet eo blev ar gelennerez da stummañ ur voull war lein he c'hlopenn, ken sachet eo an torkad ma seblant kroc'hen he fas bezañ un doubier re vihan evit an daol a glasker ledañ warni.

— Selaou a rez pa gomzan ouzhit ?

Ma respontan « ya » e klasko gwiriekat ma respont ha goulenn petra emañ o paouez lâret. Ma respontan « pas » e vo laouen o reiñ din ur c'hastiz kerkent. Foei ! Deomp de'i evit an hilligadenn neuze.

— Ya, Itron.

Sevel a ra he groñj uhel, leun a zisfiz, o tiskouez din